

## DA ROUE FRANCE

PHILIPPE SEIZ.

*Chanson Bretonne par Adrien RAISON DU CLEUZIQU*

Evid ma reno prim, Ia ! hon gwir Roue  
Pedomp holl ar Gwerc'hez hag he Mabik Doue.



Deoc'h goude Doue e dleom holl senti.  
Bed oc'h gant leron Drouk lakeet e-mez ho ty,  
Aboue hon bro gez deuz kollet ar iec'het.  
Gant mervellen an diaoul bed eo bulumet.  
Deut rak-tal Roue mad, astennet d'imp ho dorn.  
Ha Digaset ann anv goude ar gouan skorn.



Ebarz kreiz ar poull fank pel a zo omp koueet.  
Tolet omp bed enn-han gant eur bern jalodet.  
Ho zad ann drouk speret, a zo tad ann holl gaou.  
Gwerza ra aliez billy tan evit kraou,  
Ha togo touseged evid gwastel gwiniz.  
Laerez ha ra ann holl, everien hag hostis (r).



Pa lakaas Eva he dorn war an aval,  
Ea c'houie gwir ha krak a re eun dra gwell fall.  
Ar pec'het roas d'ezhi eun tol spontus ha strons.  
Ann aval a goueas kerkent enn eur blonsan.  
Ni, zo bugale diwar ann tam yac'han,  
Ar republicanet a zo diwar ar blons.



Bez a zo pel amzer ziouaz evit omp holl.  
Emaint evel moc'h goue ho porc'helli ar vro,  
Kassomp anhe rak-tal, fonnuz, diwar hon zro,  
Rak gant-he a viskoaz, ne meump bet nemed koll.  
Tud hag ho deus ann tu vit boeta ann higenn,  
Tamo krak aoutronez ho deus c'houez ar kignenn.



E teufet kam ha tort ha posleic'h ha kromet.  
Koll a refet ho nerz, koll a refet ho ialc'h,  
Deuz ho dorn e kouezo hag ar bal hag ar falc'h.  
N'ho po tam peuc'h ebed, nag er park nag enn ty.  
War ho tal vo laket oc'h eun den milliget,  
Ha gwir e dioano plu vrann war bek ho fry.



Ma c'hallfe ann diaoul terri he stagadur,  
Rena war ann dud kez ha kemer krog er stur,  
Evel a deuz c'hoant braz ar republicanet,  
A-ben eun tam amzer ; amzer eur c'hornedet,  
Ar bed holl a vije malet ha luduet ! !  
Pa c'hefet da voti, mignonned, bet gwall fur.



Gir eunn den, ho pet sonj, zo kroc'henn he ine,  
M'ha c'het d'he lousad enn hostilliriou,  
Mar gwerset anez-hi evit gwenegadou,  
A rofet ho mouez d'eur marmouz fall bennag,  
Hag he oberiou drouk war ho kein a vo stag..  
Voted evit tud vad, tud a doujans Doue.



Merc'h hena ann Illis, ar Franç hon bro, hon mamm,  
A zo gwel izelet, bet e deuz eur gwel lamm.  
Kerzed a re soun, yac'h, gant ar roue gwechall,  
Hirie'man a dribill war lerc'h ar broio all.  
Ar votadek kenta c'hall disaman ar vro,  
Evel c'hall rei d'ezhi ive strons ar maro.

Ebarz kreiz ar poull fank pel a zo omp koueet.  
Tolet omp bed enn-han gant eur bern jalodet.  
Ho zad ann drouk speret, a zo tad ann holl gaou.  
Gwerza ra aliez billy tan evit kraou,  
Ha togo touseged evid gwastel gwiniz.  
Laerez ha ra ann holl, everien hag hostis (1).



Pa lakaas Eva he dorn war an aval,  
Ea c'houie gwir ha krak a re eun dra gwell fall.  
Ar pec'het roas d'ezhi eun tol spontus ha strons.  
Ann aval a goueas kerkent enn eur blonsan.  
Ni, zo bugale diwar ann tam yac'han,  
Ar republicanet a zo diwar ar blons.



Bez a zo pel amzer ziuaz evit omp holl.  
Emaint evel moc'h goue ho porc'helli ar vro,  
Kassomp anhe rak-tal, fonnuz, diwar hon zro,  
Rak gant-he a viskoaz, ne meump bet nemed koll.  
Tud hag ho deus ann tu vit boeta ann higenn,  
Tamo krak aoutronez ho deus c'houez ar kignenn.



D'an dud diwar ar mez e reont da gridi,  
Eur bern komzou zod naill, ar brasa marvaillou.  
Evel ar groagez koz lar d'ho bugaligou.  
Evit ho zerc'hel kleink enn noz ebarz ann ty.  
Ma roet ho mouezou d'eun Nop pe d'eur Beleck,  
Ho po noz-de d'ho c'heul eur loen du naounek.



Gant ann drouk sperejou pel a zo omp kaset.  
Arry omp er poull du zo barz pors an ifern.  
Skoulma ra ann deur brein war hon diskoaz loused,  
Diaoulou he eun c'hoarzin zo deut e mez a vern.  
Hastomp ober distro, souzomp, rak-tal souzomp,  
Poent bras eo pidi, ia ma zud vad, pedomp,  
Da c'houlenn vit hon bro gand madelez Doue,  
D'hon bro (2) emzivadez, eunn tam sell a drue.

1<sup>er</sup> Mai 1885.

(1) Aux jours des élections. — (2) Minorez. Orpheline.

Ma c'hallie ann diaoul lein he stagadur,  
Rena war ann dud kez ha kemer krog er stur,  
Evel a deuz c'hoant braz ar republicaue,  
A-ben eun tam amzer ; amzer eur c'hornedet,  
Ar bed holl a vije malet ha luduet ! !  
Pa c'hefet da voti, mignonned, bet gwall fur.



Gir eunn den, ho pet sonj, zo kroc'henn he ine,  
M'ha c'het d'he lousad enn hostilliriou,  
Mar gwerset anez-hi evit gwenegadou,  
A rofet ho mouez d'eur marmouz fall bennag,  
Hag he oberiou drouk war ho kein a vo stag.  
Voted evit tud vad, tud a doujans Doue.



Merc'h hena ann Illis, ar Franç hon bro, hon mamm,  
A zo gwel izelet, bet e deuz eur gwel lamm.  
Kerzed a re soun, yac'h, gant ar roue gwechall,  
Hirie'man a dribill war lerc'h ar broio all.  
Ar votadek kenta c'hall disaman ar vro,  
Evel c'hall rei d'ezhi ive strons ar maro.



Devez ar votadek eo ar iar here,  
Ann hini a had drok a ve bihan he bleut,  
Enn he di ar billik e deuz c'houez ann treut.  
Mar kaset kanfardet vit ober lezenno,  
Diveed vo da glem, ha klask eunn digare,  
C'hoariet vo ann taol, ha iennet vo Guillo!!!

ADRIEN RAISON DU CLEUZIOU.